

SESSION 2015

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES
SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES**

BRETON

ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique
est rigoureusement interdit.

Durée de l'épreuve : 3 heures

Coefficient : 2

"P'oan o chom e Gwened e
kasen ur bern labour da fornioù
pri-livet Lokmaria e Kemper."
(Youenn Drezen)

N'eo deuet arz ar feilhañserezh en tu-mañ d'an Alpoù nemet goude ar brezelioù a renas François I, roue ar C'hallaoued, en Italia, ha ken e oa ar bloaz 1690 ne oa ket anavezet ar feilhañserezh e Breizh. Er bloavezh-se avat e teuas ur Jean-Baptiste Bousquet bennak eus e vro - ganet e oa bet damdost da Vontpellier - d'ober e annez e Lokmaria, ar c'haer a garter kozh-se eus
5 Kemper, ma krouas ur greanti gouestlet d'ar poderezh. Estreget listri kegin a veze oberiet gantañ ha gant e vicherourien avat, rak fardet e veze ivez kerniel-butun, feunteunioù diabarzh, piñsinoù dour benniget, delwennouigoù mat da aweniñ ar bedenn, ha traezoù all c'hoazh, a bep seurt priennoù diwar batromoù hag a deue eus ar gêr a Rouen, a oa bev-mat enni, abaoe pell a oa, al labour war-dro ar poderezh hag ar feilhañserezh. Berzh a reas J.B. Bousquet, ha ken bras berzh ken e
10 treuzkasas frouezh e labour d'e vibien ha d'e vibien-vihan, o krouiñ, evel-se, ul lignez micherourien ha pennoù embregerezh ampart. Kantvedoù-pad e voe Lokmaria eta ur greizenn broduiñ, an hini vrasañ e Breizh war dachenn ar poderezh greantel, ha bremañ c'hoazh e c'heller gwelet eno a bep seurt feilhañsoù, kontet, ha gant gwir abeg, da vezañ oberennoù arz eus an troc'h kentañ, warno patromoù bet livet gant arzourien a-vremañ evel Patrice Kudenneg, da skouer. Ma tichañs deoc'h
15 tremen dre Gemper, kit d'ober un dro betek Lokmaria.

E feur va meno ez eo Lokmaria kaerañ ha livusañ karter Kemper. Petra a c'heller gwelet eno ? Deuit da'm heul, ha me a ziskouezo deoc'h : e penn ur straed strizh riblet a diez kozh gronnet gant mogerioù pezuhele ha kaeraet gant liorzhoù, setu ur blasennig bevennet gant ur c'haer a savadur mein-benerezh, dezhañ un talbenn kemparzh¹ a bep tu d'ur sal ec'hon, a zo lojet enni skalieroù
20 ledan-ledan : ar prioldi kozh an hini eo, bet lakaet sevel e-doug ar XVIIvet kantved gant un abadez hag a oa Marie de Bourgneuf hec'h anv. Er savadur-se eo e vevs, kantvedoù pad, al leaned hag al leanezed a rae war-dro an abati a oa stag outañ. An abati-se a oa amreviat. Ur ral eo bet en istor gwelet evel-se leaned ha leanezed o vevañ, o pediñ, hag o labourat en hevelep abati, ha, din da c'houzout, n'eus bet er renad kozh, nemet abati Fontevrault oc'h heuliañ an hevelep reolenn.

A-dreñv ar prioldi, ur steudad pileroù maen a zoug bolzioù gwareg : sed an nebeudig a chom eus ar c'hloastr. An iliz avat a zo tremenet an amzer warni, a gantved da gantved, hep degas nemeur a gemm en he stumm, ha danvez ur sell a zo enni, gant he bolzoù roman hag he daroù greunvaen, engravet warno ledskeudoù hag arouezennoù peuzdiverket, o reiñ dimp da c'houzout anvioù an aotrouien hag an itronezed a zo bet beziet dindano. An iliz-se, bezañ ma 'z eo dilorc'h, a
30 zo kalz koshoc'h eget iliz-veur Kemper, rak e Lokmaria eo e voe diazezet ar gêr, ha n'eo ket, tamm ebet, en tu all d'an Oded.

Ar pezh a ra da Lokmaria bezañ ken kaer ha ken plijus eo al liorz a gaver, damdost d'ar blasenn, keit-ha-keit, war-bouez nebeut, diouzh ar prioldi ha diouzh ribl an Oded. Kempennet eo bet n'eus ket gwall bell zo, ha klasket zo bet terkañ ul liorz e-giz ar Grennamzer, ur meni mirva
35 louzawouriezh. Tostik-tost d'an dour e c'heller, e devezhioù touforek an hañv, tañva an disheol hag ar freskadurezh e gwasked torkadoù gwez deliaouet-stank, ha dont da gaout un tamm anaouedegezh eus ar plant krap, ar plant red, ar plant geotek hag eus al louzaouennoù.

Hogen ned it ket da embann war ar groaz, en anv Doue, ez eo Lokmaria ul lec'h ken dudius : ra chomo an douristed da straniñ er straedoù kozh a gaver en-dro d'an iliz-veur, ha ra chomo
40 Lokmaria ul lec'h gouestlet d'an diskiuzh, d'ar gened sioul ha dilorc'h, ha d'an emsoñj !

- | | |
|---|---------|
| 1 - Piv en deus degaset arz ar feilhañserezh da Gemper ? Pegoulz e oa ? | 1 poent |
| 2 - Hag ur stumm dioutañ e-unan a oa gant feilhañserezh Kemper adalek ar penn-kentañ ?
Displegit. | 2 boent |
| 3 - Da betra e servije an traoù a veze produet er feilhañserezh en deroù ? | 1 poent |
| 4 - Traoù hengounel hepken a vez produet e feilhañserezh Kemper ? Displegit. | 2 boent |
| 5 - Penaos e oa disheñvel abati Marie de Bourgneuf diouzh ar re all ? | 2 boent |
| 6 - Petra 'chom eus iliz Lokmaria a wechall ? | 2 boent |
| 7 - Peseurt doare liorz a zo bet nevez-kempennet war c'hlann ar Stêr-Oded e Lokmaria ? | 2 boent |
| 8 - a) Perak e kav gwelloc'h ar skrivagner e chomfe an douristed da straniñ e straedoù Kemper
kozh e kreiz-kêr ? | 1 poent |
| b) Petra a soñjit-c'hwi diwar-benn e savboent ? | 2 boent |
| 9 - Treiñ e galleg adalek "A-dreñv ar prioldi" betek "ha d'an emsoñj" e fin ar pennad (linenn 25
betek linenn 40). | 5 poent |

¹Kemparzh : symétrique